

**Hon Tad :** hag a zo en neañ, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel en neañ. Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion Met hon diwallit doc'h an droug.

*Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :*

**R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

**Lid ar peoc'h :**

*Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.*

*Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h. R/ : Ha get ho spered !*

**Oan Doue :**

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pezit truez doc'homp ! (bis)**  
**Roit deomp ar peoc'h !**

**Kent ar gomunion :**

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :*

*Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,  
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

**Komunion : Bara burzhodus, Korf Jezuz,**

**O mammenn sklaer ar Baradoz**

**C'hwi 'zo hon nerzh hag hor buhez.**

- |  |   |
|--|---|
| 1 Bara ar vuhez peurvanus<br>Korf ha gwad hor Salver Jezuz,<br>Donezon kaer karantez Doue. | 3 C'hoantoù mab-den a zo gwalc'het<br>Bara ha gwin a zeua da vout<br>Bevañs santel ar gristenion. |
| 2 Koan ar Yaou bras àr an Aoter,<br>Ar mem Bara hag ar mem Korf<br>Etrezomp a zo lodennet. | 4 Ar an douar-mañ e vev mab-den<br>Er boan hag el labour kalet :<br>Bara Jezuz a vo e nerzh.      |

**Veit kloziñ an oberenn :**

*Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :*

**R/ : Ha get ho spered !**

*Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :*

*An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.*

**R/ : Amen !**

*Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver :*

**R/ : Bennozh da Zoue !**

**Kan-dibenn :**

Intron santez Anna, diskouezit d'ho pugale,

Diskouezit 'vel d'o zadoù douster ha karantez,

Ar ho pobl lan a feiz daet amañ a vostad,

Strewit get largantez ho krasoù, ô Mamm vat.

Hon tud kozh en hor raok, a zeuae setu gwerso,

D'hoc'h enoriñ amañ avel Rouanez ar vro,

Gouarn a ra ho chapel etre he mangoarioù,

Frond bev o c'harantez, frond c'hwek o fedennoù.

**Parrez Ker Anna**

**5<sup>t</sup> Sul ar C'hoareiz**

*6 a viz Ebrel 2025*

**« Me naket n'ha kondaonin ket »**

**Kan digor :**

**Mall-bras eo din, pec'hour,**

**Distroiñ doc'h ma C'hroueour ! (2 wezh)**

Ha c'hwi 'venn atav dispriziñ,

Bouezh ar C'hroueour, Mestr holl ar bed ?

Emañ gwerso doc'h ho kalviñ :

Chom a rehet-c'hwi bouar bepred ?

Goude ma 'n deus Doue ho kroueet

Dre vadelezh ha karantez,

Hañval 'vehe eh oc'h er bed

'Veit gober poan dezhañ bemdez !

Er stad ma 'n em gavit hiriv,

Eneañ dispartiet doc'h Doue,

Seblant a zo geneoc'h bout bev,

Ha c'hwi 'zo marv e gwirionez.

Devat ho Toue, dait get glac'har

Hag 'n em daolit àr e galon :

Rak ho Tad eo, hag hep arvar

D'ar prodig e roay ar pardon.

**Salud d'ar bobl :**

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad*

*hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

**Respont : Ha get ho spered !**

**Confiteor : Me anzav dirak Doue holl-gelloudek ha dirazoc'h, ma breudeur, am eus pec'het bras dre soñj, dre gomz, dre ober ha dre vank a ober : dre ma gwall, dre ma gwall, dre ma brasañ gwall.**

**Rak-se e c'houlennan get an Intron Vari bepred gwerc'hez, get an Aeled ha get an holl Sent, ha geneoc'h-c'hwi, ma breudeur, pediñ Doue aveidon.**

**Kyrie : Aotrou Doue, ho pet truez doc'homp/Aotrou Krist, ho pet truez doc'homp/  
Aotrou Doue, ho pet truez doc'homp.**

**Lennadenn gentañ : Lennadenn tennet a levr Izai.**

*'Vel-mañ e komz an Aotrou, an hini a zigoras un hent a-dreuz ar mor hag ur vinotenn dre greiz an dourioù bras, an hini a lakaas da sevel kirri ha ronseed, un*

arread a vrezelerion kalonek, evit o lakaat da gouezhel ha da chom hep sevel endro, da vout mouget, peurlosket 'vel ur vechenn.

«Chomit hep derc'hel an disterañ soñj ag an degouezhioù tremenet, hep derc'hel kont ag an traoù a wezharall. Rak, setu ma yan d'ober un dra nevez; emañ dija é kelid ! Ha n'he gwelit ket-c'hwi ? Monet a ran da zigor un hent nevez en dezerzh, ur vinotenn en douar digenvez. Loened ar stepenn - ar chakaled hag ar strujkañvaled - mam meulo abalamour ma lakain dour da strimpal en dezerh evit torriñ sec'hed ma fobl, ma dilennad, ar bobl am eus formet evidon-me hag a zalc'ho da reiñ melasion din. Setu komz an Aotrou Doue : **R/ : Bennozh da Zoue !**

### **Psalm 125 : Traoù burzhudus en deus graet an Aotrou evidomp,**

#### **ha laouenaet omp bet !**

Pa zegase an Aotrou d'ar gêr harluidi Sion,  
e oamp 'vel en un huñvre.

En hor genoù neuze e sone c'hoarzhadegoù,  
hag àr hon teodoù kanerezh.

Neuze e-mesk ar broadoù e lâred :

«An Aotrou en deus evite graet burzhudoù.»

Ya, burzhudoù en deus graet evidomp an Aotrou;  
hol lakaet en deus e barr al levez.

Aotrou, chenchit arre hor planedenn,  
evel an dezerzh get dourioù-red.

Ar re a daol an had en ur skuilh daeroù,  
a ved e-kreiz al levez.

Mont ha mont a ra en ur oueliñ

an hini a daol an had ;

dont ha dont a ra ur ganiñ

an hini a zoug ar feskenn eostet.

### **Cil lennadenn :** Lennadenn tennet a lizher an Abostol Paol d'ar Filipiz.

Ma breuder, oc'hpenn kement-se e sellan pep mad am boa a-gent 'vel ur c'holl e-keñver ar gounid uhel-murbet a zo anaoudegezh ar C'hrist Jezuz, ma Aotrou. Evitañ eo em eus kavet gwelloc'h koll pep tra; sellet a ran pep tra 'vel lousteri evit gellat bout d'ar C'hrist, ha bout kavet ennañ, ha nepas ken get ur jurtis din-me hag a zahe ag al Lezenn, met get ur justis hag a zeua dre ar feiz er C'hrist, an hini a zeua a Zoue hag a zo harpet àr ar feiz.

Ar pezh a faot din a zo e anavet get gelloud e adsavedigezh a varv da vev, komuniñ d'e boaniou, donet da vout hañval doc'htañ en e varv, evit degouzhel, mad eo posupl, en adsav a vesk ar re varv. N'eo ket em behe dija gounidet ar priz, nag e vehen daet da vout parfet, met derc'hel a ran da redek en ur glask tapout krog er priz, er mem feson m'en deus ar C'hrist tapet krog ennon ivez. Nann, ma breuder, ne soñjan ket am behe c'hoazh tapet krog ennañ, met un dra hepken a ran : ankouaat an hent lezet genin àr ma-lerc'h, ha stenniñ holl ma nerzh da vonet àr-raok àr-zu ar pal, àr-zu ar priz on galvet get Doue da gaout en neañv er C'hrist Jezuz.

Setu komz an Aotrou Doue : **R/ : Bennozh da Zoue !**

### **Aviel :**

**Komz peurbadus ag an Tad : gloar deoc'h-C'hwi, Jezuz-Krist !**

**Komz peurbadus ag an Tad : gloar deoc'h-Chwi, hor buhez !**

*Bremañ, e lâr an Aotrou, distroit davedon a greiz ho kalon,  
rak trugarezus ha truezus eh on.*

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Yann.

**R/ : Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

En amzer-se e yas Jezuz da vanez an Olived. Met da darzh an deiz e tistroas d'an Templ hag an holl bobl a zerede davetañ; hag e azezas hag en em lakaas da gelenn. Neuze ar Skribed hag ar Farizianed a zegasas dezhañ ur vaouez bet tapet ec'h ober an avoultr. Ur wezh bout he lakaet en he sav e-kreiz an holl e lârazont dezhañ : «Mestr, ar vaouez-mañ a zo bet tapet àr an taol ec'h ober an avoultr. El Lezenn, Moiz en deus gourc'hemennet deomp meinata ar merc'hed sort-se; ha te, petra a lârez ?» Komz a raent 'vel-se evit en amprouviñ evit kaout digarez d'en tamall goude. Met Jezuz a stouas ha get e viz en em lakaas da skriv àr an douar. 'Vel ma talc'hent d'ober goulennoù doc'htañ, e savas e gein, hag e lâras dezhe : «An hini ac'hanoc'h a zo dibec'h, ra daolo-eñ ar maen kentañ dezhi.» Hag goude bout soublet arre e skrive àr an douar. Int avat, é klevet kement-se, en em dennas kuit unan àr-lerc'h an all, ar re goshañ da gentañ, ken ne chomas mui ken 'met Jezuz hag ar vaouez en he sav e-kreiz an dud. Jezuz a savas e gein arre hag a lâras dezhi : «Maouez, e-men emaint ? Den ebet n'en deus ha gondaonet.» Hi a respontas : «Den ebet, Aotrou !» Ha Jezuz da lâret : «Me naket n'ha kondaonin ket. Kae, hag àr vremañ chom hep pec'hiñ.»

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

**R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

### **Pedenn hollbedel :** Taolit àrnomp, Aotrou, ur sell a drugarez.

**Lid ar profoù :** ar beleg : Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :

**R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

### **Prefas :**

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

**R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

**R/ : Emañ troet trema Doue !**

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

**R/ : Just ha santel eo !**

### **Santel :**

**Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !**

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : **Hozanna e lein an ne !**

Benniget an hani a za e anv Doue : **Hozanna e lein an ne !**

### **Gorreoù :** Ra vo meulet !